

# Chanson nevez Potret an Arc'hant

446<sup>a</sup>

↔ ↔ ↔

*Var eun ton charmant*

K  
50.

Pa em beus cavet matier e teuan da implija  
 An nebeut speret a meus evit gallout rima  
 Eur ganaouenic nevez var boes an dud yaouank  
 Avlan e n'em henti bars an amser bresant.

Etre an oll e cavan daou e particulier,  
 Eb digeri va ginou da lavaret gevier,  
 En em gar en onestia gant fidelite  
 Ag a vo sur unisset, met o zud he c'chersfe.

Mes ! en amzer-mân, vel mer gouzer erfad,  
 Ne estimer muy an dud mar n'o dese yalc'had ;  
 Eur yalc'had queit a va brec'h, eur reng a bemp scoet ;  
 Mar o peus tout an dra ze, c'houi o po do souet.

Bet e zeus bet eun amzer, mes brema ne ma muy,  
 Ar re gos ho deus guetet ag ho deuz contet din  
 Ne glasquent met tud renquet dre o c'homportamant  
 A breman na seller muy nemet deus an arc'hant.

Pe c'houi vo den a feçon pe c'houi ne veot quet,  
 No po netra da souja, mar o peuz dec mill scoet :  
 Goulennit ag o pezo an hini o po c'hoant ;  
 Na neus quet a zarboudou vit potret an arc'hant.

Me am beus bet remerquet, a goelet ran atao,  
 Pa vez quistion d'ober demiziou em bro,  
 E zeo potret an arc'hant eo a c'honez bepret,  
 Lec'h a re all ne gavon met eur treuch col da lipet.

Estonnet on gouscoude o tonnet da gompren  
 E zeuz quement a attach evit madou monden,  
 Rac guelet a ran bembez tub o vonet d'ar be,  
 Ne ya met eur gos lincer ac eun archet gante

En despet da guement-se, e vo cavet bepret  
 Cals a dadou a mamou, ag eb scrupul ebet,  
 O c'hampech o bugale da gemeret o c'hoant,  
 Evit quemer eur bati eneb o santimant'

Me a meus gret va unan, dre va experianç.  
 Na n'ez quet c'hoas pel amzer m'a poursuen va chanç ;  
 An avaristet alies laca ampichamant,  
 Ag ar separation entre an dud yaouank.

Me moa choaset da vestrez eur plac'h honest meurdet'  
 Pehini a garen sur ya, dreist an oll verc 'het  
 Ag e c'hallan lavaret, a memeus assuri,  
 E voa quer fidel din evel ma voant dezi.

Bet ezom eur penab mab ous ,nem zarempredi,  
 Epad eur blavez pe zaou, marteze memeus tri,  
 Ag or poa credet parfet e vijemp unisset,  
 Mes e creis hon esperanç e zomp bet separat.

Epad hon entretien, e parlantem bepred'  
Eus an opposition a alfemp da gaved.  
Demeus a berz hor c'herent, balamour d'hon dauez.  
Rag allas ! ar yalc'h scanvan a oa eus va c'hostez.

Ag ar pez or boa sonjet, a so bet arruet,  
A ben eur penad goude e zeo bet prononcet,  
An arret a zisparti etrezomp-ni hon daou,  
Colet hor heus hon amzer ag uzet hor boutou.

Pa oamp-ni e nem gavet en eun tu a goste,  
Eur vech e particulier, hi lavaras din-me,  
An daelou n'he daou-lagat, he mouëz anter troc'het,  
Allas ! e m'ei, va mignon, nimp a vo separat.

Eun den so deut d'am goulen ag en deus fors arc'hant  
Me a ranko en quemer a n'am be quet a c'hoant,  
Me ze c'hoas merc'h minores ne meus met naontec-vloa  
Non quet mestrez ma hunan, ret eo obeissa.

Mes c'hui tadou ha mamou, qerac e exercet,  
E gever ho pugale eur pouar difennet.  
Ne n'och quet quen ignorant quement n'a ouifec'h quet  
Ar dez a rer evelse zo eur c'has reservet.

Rag ar Brovidanç diaxin o deveus destinet.  
He chanç ba dep crouadur, pa zeo deut var arbeb  
Ah c'hui tad mam dinatur, c'houi o c'heus, ta sonjet,  
E commandet d'an hini e deveus o crouet.

Ho pugale zo dezhan moyoc'h eguet deoc'hu,  
A pa resistit outhan alies e arru.  
E velit ho pugale en eur vrassa mizer,  
Daoust dar berniou arc'hant a deus en ho syer.

Guelet recomp exemplou dirag on daoulagat.  
Bugale rei ho maloz d'ho mam couls a d'ho zad,  
Dre m'a d'eus o c'hontregnet, ep aon da gaout pec'het  
Da rei ho dörn d'ar re ne oa quet d'he gleet.

Clevit comzou eun den fur, o parlant evel-se,  
Eun demezi mal a gret dre volonte Doue.  
Zo eur Barado-s-terrest; mes an hine ve gret,  
Dre au arc'hant zo lies eun ifern anticipet.

Perac c'hoas, tad dinatur, a c'hui mam obstinet,  
E forceit ho pugale da zon da guemeret,  
Tud ag a rei ho malheur, er bed tre ma vont-hi,  
Ag a vezio sioas caos dez'ho d'en em zaoni.

C'hui vir eus ho pugale da guemeret o c'hoant,  
Evit dont d'o dimezi me lavar d'an arc'hant.  
O dorn o deveus roet, met o c'halon deuz quet,  
A birviquen plijadur n'o do muy var ar bed.

Neo quet vidon va unan e laran quement-ma.  
Rac me zo etablisset eun tamic zo dija,  
Ag ar plac'h am heus hentet so ive demezet,  
Gras dei da veva eurus atao gant e fried.

Me garfe retorn brema var amzer basseet,  
Vit n'em zisposi gueloc'h en hini da zonet,  
Mes allas ! va mignonet nac en eil nac eben,  
An hini a ve et cos ne all yaouanquat quen.

Mes c'houi oll potret yaouank pa noc'h demezet c'hoas  
Eun avis a roan deoc'h : pa zeot d'ober o choas,  
Sellit atao en o renq a non pas huelloc'h.  
Gant aon da dapout lamou ac a ve noazus deoc'h.

Ia, c'hui tudigou yaouank, pa o peuz an amzer,  
Considerit eun neubeut, a c'hui a velo scler,  
Pebeus chanchamant a zeu goule an dimezi :  
An tourmant ac ar glac'har an irvout, an annui.

Mar em beus c'hoas eun avis da reï deoc'h mignonet,  
Eo ma teufet da zioual, dre ma moch c'hoas abret,  
Na ve ho calon charmet dre ar faus amitie,  
A mar gueillet var c'hentel, c'hui vo furoc'h a ze.

Rac ar merc'hed yaouank-se a so tromplus meurbet,  
Na ziscouezont met eun tu, an tu all vo cuzet,  
Me lavar : eur plac'h yaouank so evel eur rozen,  
Pehini en demezi a chanch en eur spernen.

Finissa ran va chanson gant eur galon laouen,  
En eur bedi tad a mam da zonet da gompreñ,  
Ez eo guelloc'h union entre an daou fried,  
Evit neo disunion gant oll vadou ar bed.

---

## CHANSON DAOU DEN YAOUANC

---

*Var eun ton nevez*

13 Mar gallan gout ar feçon e rancquan composi,  
Ur chanson hac eur c'henviat herve va faltasi,  
Var sujet daou den yaouanc, tud a condition,  
Estimet en ho farres gant an dud a fesson.

Ne oan nemet unec vloa pa int bet commencet,  
Ha dre oll en em gueven en hent gant ho loenet,  
An hini a ve goassa eguale a secoure,  
Ber e guaven an amzer ho tremen ho bue.

Pa oan daouzev vloa echu, int eat er c'hatechis,  
Hag en em heullien dare evel ma oa no guis,  
Bete ober ho zri fasq e mesk ar vugale,  
Bep bla e cresq ar mail e chaden ho amitie.

Er bla varlec'h ma int eet er mes c'hatechis,  
E hin commencementet ho daou da roula ho yœuanquis,  
He c'hondui a rea d'ar guer deus a bep assamble,  
Evel daou den unisset en ilis gant Doue.

Ho zud ho velet ar merq deus o fidelite,  
A sonjas ho separi an eil deus eguale,  
Ar plac'h a ya d'ar gouen, peder leo diountan,  
Evit ma c'hanconaje bea fidel dean.

Pa int bet dispartiet an eil deus eguale,  
Ne sonje quet gand ho zud ho devoa finisset,  
Ar goas a ouie scriva ac a gass lizero,  
Eur veach ar sizun, ressus, da glevet he c'helio.

Pa echuas an amzer e teu ar plac'h er mes,  
N'ho devoa quet ar bouer d'he ober leanes.  
Hac en em c'heuillen darre, evel an eur guenta,  
Eur garante ne oa quet evit e distruja.

Betec eur bla var-n-uguent in bet em c'heulliet,  
Quen a erruas an urs da denna ar billet,  
Neuze ho deus renoncet dar plijadurezo,  
O doa bet assambles dre an assambleo,

Pa antre an den yaouanc er gramp evit tenna  
E santas e oll vemprou da gommanc da greonna  
Hac e sonjas e tenje eun numero izel  
Hac e ranqje separi deu e vestres fidel.

Hasten a re e zorn pa erruas e renq  
Hac e tigoeas gantan an numero uguent !  
Cetu mantrat e galon ha beuzet en glac'har,  
Quen a garje e vije eet divar an douar.

Pa oue annoncet dezi gant he gamarado,  
Penos en devoa tennet, ha pe seurt numero,  
E lavaras a voues huel, arôc ma partije,  
E voelje e lianan a lacat en e be.

Ar zul arog ma parti o deus quimiadet,  
O tont deus a gousperou int en em rencontre,  
Ha daelou ho daoulagat a glabie ho dillat,  
E coste ar c'bleus pa oant o c'hober ho c'himiad.

Abaoue hon bugaleach ma mestrezic fidel,  
E sonjamp e oam c'hoas gant Doue eternel,  
Evit bea unisset an eil gant eguiile,  
Queit a ma vijen leset er bed-man en bue.

Hon daou e voamp ho veva er memes santimant,  
Rac ma speret emezi e voa pareillament,  
Me sonje din na vijemp birviquen separer,  
Quen a bliche gant Doue ont c'has divar ar bed.

Abalamour da Doue, pa rankan partial,  
Evit merq a garantez ouzoc'h a c'houennan,  
Ar mouchouar so ganec'h o sec'ha o taelou,  
Ma ellint sellet outan, beteg fin ma deiou.

Dimeus a greis va c'halon emei va mignon quer,  
E c'hastennan d'ec'h va dorn da rei ar mouchouar,  
Lequet-en en ho codel a dalc'hit mad dean,  
Mar ho pes soulajamant o tont de visitan.

Tachit d'en em gonsoli e queit a ma veet,  
Ne vo quet hir o conje deus a liou a zougouet,  
Car ben pemzec de aman ac an de a hirio,  
E vo peb hini ac'hanomp o repos en e ve.

Credi a ran fermamant ar pes a lavarit,  
Rag evel ma c'herruin e guer a Sant-Brieuc,  
E c'houllennin eur billet da vont d'an hôspital,  
Ac'hane vin transportet a laquet en douar.

Dindan ar pevar devez ma e bet partiet  
Eo marved ar plac'h yaouanc er guer, ag interred,  
Daou devez just ar goule e c'herru ar c'helio  
E oa maro e mignon, Doue d'ho fardonno.

Queit a ma vev an eil den en glac'har d'eguiile,  
Ne quet echu ar respect hac ar fidelite.  
Goulenomp oll a galon ma voïnt recevet,  
Gant Jesus hac ar Verc'hes ebars an evurusted.